

ANN DASPRENER

Ton *Kelven* ; pe : Va c'haloun a zo fraillet.

Beteg peur, o va Doue, e vo gullet Bro-C'hall
Breset gant enebourien, pistiget gant tud fall !
Peleac'h ema ar sturier helfe dre he furnes
Miret outhi da skei ous kerreg didrues ?

Eunn den, eunn den a glaskomp ha ne gavomp netra
Nemet bugale dister var ho zreid o krena,
Enn ho dourn eur stoloker pa ve red eur c'hlese
Great gant dir, great gant houarn ha dremmed a-zoare.

Penaos eta e stourmimp ous ar ganfartet rus
A zo e kear, er meziou o labourat founnus,
O teureul kranch ha bilim ous kement a zo mad
Hag o vernia ar c'heuneud 'vit ober eunn tantad.

Ann tantad-ze, mar gellont, eb dale a zevo
Hon enor hag hon danves, hor feiz-kos hag hor bro,
Ne chomo var ann douar nag ilis nag aoter.....
Var ho tillad e nijo ludu kroas hor Zalver.

Ra zeui va zeod dirazoc'h da skourni em ginou
Ha va breac'h-deou da zounna, ma prezega ar gaou !
Paris o tivogedi, eunn-arc'hescop lazet,
Re sklear, siouas, a ziskoes ne laran gaou ebet.

Ma vije da viana peur c'hreat ann abaden
Hag ebestel ann dizurs diskaret da viken !
Neuze, goude kals daelou, e c'helchemp ehana,
Mes goassoc'h eget biskoas ann drouk zo o struja.

Nann, n'eo ket mouget avoalc'h glaou Gomor ha Sodom,
Lakit ho tourn varnezho hag e santfoc'h int tom,
Pa c'hoezo ann diaoul, emaint beo adarre...
Krena ra va izili : va Doue ! va Doue !

Ar Republik a lavar e c'hello dont a benn
Da zerc'hel bleizi, denved, e peoc'h var he barlen,
D'ober breudeur anezho, d'ho c'has var al letoun
Evit eno, fri ha fri, glazeri ho c'haloun.

Ann denved a zo denved, kigerien ar bleizi,
N'eo ket furnes ho lakat mesk a mesk da beuri,
Pa vo stag gant ar yeot ar paour keas pen danvad
Ar bleis a zaillo varnhan hag a evo he c'hoad.

Deuet eo bet ar Republik diou vech enn hon toues
Atao divar ar gounnar, fall-tu ha divades,
Laeres, blasphemé Doue, laza ha c'hoas laza :
Chetu e tri c'her histor ar Republik kossa.

Hag em be kant teod maques, birvidik em ginou,
Biken n'helfen diskleria pegement a grimou
Zo bet great gant ar c'hrac'h-ze a vuntras roue Frans
Hag a gassas d'ar chafod beleien ha noblans.

Ann eil Republik ive, henvel ous he mam gris,
Lipous a zunas ar goad var mein ruiou Paris,
Kement a fank a vressas ma chomas bars ar pri ;
Ne danos ket va lagad oc'h ober kaon dizhi.

Ar Republik zo hirio a zo mes he guelet,
Eur barr toussigi arne var hor bro zo skoet ;
C'hoezet var ho c'hrabanou var gourre ann doren
E kav dezho int goazet... amprefanet n'int ken.

Ne ket gant pri ar poullou eo e vev ar re-ma,
Na gant nebeud guenneien, tra, tra, tra, tra, tra, tra,
Pa vezo bet eur rummad e teui eur rummad all
Ha goaderezet neves evit suna Bro-C'hall.

Atao e vimp ruill, diruill er revolution
Rak hor Republikanet zo eb relijion,
Chenchet hor beus daouzec guech e pevar-ugent vloas
Hag a fors da ziloja emaoump hirio enn noas.

Ne deus nemet eur remed da drouc'ha hon tersien,
Doue enn hor c'halonou hag eunn den enn hor penn,
Eunn den ve ar guir ganthan 'vit miret da laret :
Perak hennes enn huel ha me ne vefen ket ?

Epad pevarzec kant vloas ar Frans zo bet eurus,
Dreist peb bro anavezet hounnes a ioa nerzus ;
Pa lavare eur gerik, an douar a dave
Ha pa zave he baniel ar bobl oll a stoue.

Rag neuze ar Fransisien a ioa guir zoudardet
A zifenne ann ilis hag ar guir dre ar bed,
Neuze hor boa rouanes legitim ha kristen
A ioa gloar hag enor stag ouz ho drapo guenn.

Ma vichac'h bet ganeom-ni sant Lois, Herri pevar
Er brezel-ma trubuillus hon ledas d'ann douar
Ketao, Bismark a Guillou, araok mont a Vro-C'hall
O piye lounket houarn, eleac'h guin ha kig sall.

Nann, ne ket ners na kaloun a vank d'ar Fransisien,
Nann, nann, netra ne vank deomp, netra nemet eunn den,
Eunn den a lignes huel, ennan feiz iac'h ha kre
Hag enn de d'hor c'hommandi ar guir a bers Doue.

Eus a c'hoad Herri pevar e chom eur beradik,
Eus a goad-ze ken nerzus, ken dous, ken pinvidik,
Miret gant ar Brovidans, ma vi, Frans, adarre,
Ar c'haerra rouanteles goude hini Doue.

Arabat eo argila, dre ma klevimp krial,
Bezomp eur vech kalounek, arpomp ous ann dud fall :
Herri pemp zo dirazoc'h, ganthan he vaniel guenn,
Hennes eo hor guir roue.... Plas dezhan, Fransisien.